

# ABREGE

DEUS

## AR VARN GENERAL

### PE AR JUGEAMANT DIVEZA.

Var an ton : *Separation an ine deus ar c'horf,*  
*pe un cer sermon.*

SALUD dec'h humblamant a ran, auditoret ;  
Iscus a c'houlennan pa nen don studiet,  
Da ray dec'h eur boquet a deu demeus ar gloar,  
Eun abrege tennet deus ar Varn General.

Ar sin demeus ar groas eun de a apparisso,  
Pa zeui er fin ar bed Jesus, on guir Otro,  
Evit fouilla ar guer deus a Jerusalem,  
Men fell din lavaret on ineo ep quen.

Compagnunes santel, vertuus a meulabl,  
Glac'har so em c'halon o tonet d'o quitat,  
Pa zeuan da sonjal en o fidelite,  
O c'heus bet d'on seleo en duran an tri de.

Men voar n'en de quet bet eloquant om c'homso,  
Evel ma ve glet da declami verrio,  
En eur compagnones santel a vertuus :  
Evit an actoret me a c'houlen iscus.

Groed on eus on possubl a laquet on ol boan  
Da essa contanti sperejo pep unan ;  
Men garge e mije sperejo an Ales  
Da gontanti pep-unan herve e volontes.

Men voar, assistantet, noc'h quet c'hoas contant :  
En fin peb tragedi voar custum da gaet  
Eur boquet spirituel memeus aon so em c'halon  
N'en don me incapabl a ze en hep feson.

Tennet e meus dar sort gant ar re savanta :  
Allas ! hac eo digoueeet gant an ignoranta,  
Rac se, compagnones, mar deu din bea troublet,  
Ne vo quet dre ma faut, rac se ma iscuset.

Ne on quet cals a dra nac ive studiet  
Da barlant eur mister vel so din digoueeet :

Nemerdoc'h, ma Doue, ennoc'h e meus fiars,  
Ebars en o c'hanome a ya da gommans.

Speret sacr a santel, prosternet d'an daoulin,  
M'o pet da rei o cras d'o servijer indign,  
Da dont da rapporti ar pes so guirione :  
A ze omp assuret, guelet vezo eun de.

Cheffo deus an Ilis, da Zoue ministret,  
A gant ar re pere ar gouernamant so roet  
A quement a observ lezen ar guir Doue,  
Tud dimet, tud yaouanq, ac ive bugale.

Bugale e zomp oll da Grouer ar bed-ma,  
Deus a ligne Adam ac e briet Eva,  
Hep respecti hini na nep sort qualite,  
Ol e credan e zomp mempro da cun Doue.

Me deu da bresanti dec'h oll evit boquet,  
Mab an Tad Eternel, ebars en fin ar bed,  
O tisquen eus an ev ac e groas dirazan  
Da varn ac'hanomp ol ar veac'h divezan.

Mab Doue, pehini so deut voar ar bed-man,  
Incarnet er Voerc'hes, dre c'hbras ar Speret-Glan,  
A seui certen un de da varn en general  
Quement den so er bed, dre eur setans final.

Deut d'en em gonsideri ac e n'em aretet,  
Rac ret vo dimp bean net demeus a bec'het,  
Pe na antrefomp quiet en ev certenamant ;  
Rac se, me o suppli, bevomp honestamant.

Chetu aman ar sujet demeus ma entrepris :  
Compagnones santel, bezet ol attantif.  
Moyen gand graç Doue, me laro pen-da-ben  
Ar signo bras a vezo quent evit fin ar bed.

Mave nin, a songfe, ebars en on c'halon,  
E lequafemp hon foan d'ober reflexion,  
Nin dese da guitat a gren on pec'hejo  
A da ober pinigen demeus on oll foto.

Pa sonjan em speret dan devoes terrub-se,  
E renquan apparissa dirac ar Vajeste  
Deus a Varner ar bed, da rentan cont dean,  
Vel ma lavar ar Prophet, gant eston e crenan.

Ar Sent ar re vrassan memeus ar Vartiret  
En o brassan poanio voant mui tourmantet,  
Crenan ra o c'halon o tonet da sonjal  
En devoes terrub-se deus ar Varn-General.

Pa eo gant cals a boan ar re justan salvet,  
E me ar Pab Innoçant, petra a vezo gret  
En treomp pec'herrien, en durant on buc  
On eus ni tremenet o c'hoffansi Doue ?

Breman me laro dec'h, vel m'e prophetiset,  
Ar signo a apparisso quent evit fin ar bed,  
Me o pet d'o seleo gant humilite a silans :  
Me a ya d'o expliqua ebars en o presans.

An Antechrist a deui ebars en fin ar bed,  
Eur map da Lucifer partout evit presec,  
Prezec rei eul lezen contrel d'ar guir Doue :  
An nep nen credo quet a gollo e vue.

Invanti rei poaniou evit dont da spontan  
Ar re na deuiout quet da distrei gantan ;  
Sivous ! cals a dud, gant spont deus e clevet,  
A credo d'e lezen a vezo ol collet.

Ar Prophet Eliás, mignon bras da Doue,  
A denio da brezec e enep d'e volonte,  
Da gonjuri ar bobl da derc'hel mat dar fe  
A da soufr ar maro quent renons da Zoue.

Brezel ac ar guernes ac ive ar vocen,  
Assembles e vezo an teir goalen o ren ;  
Ar guernes a vezo quen terrubl er vro-man,  
Quen a zeui gant famin an dud da disec'han.

Ar goad em goazio e deu d'en em lassa  
Pa deuan da sonjal en devez terrubl-ma,  
Rac cals demeus a dud neuse a soueto  
Gant an trubuillio bras e ve fin d'o deio.

Quement vo en disurs, betec al loenet mut,  
Gant mocjo glac'harus a epouvanto tut  
Ac a laquañ ane da donet da sponta  
Betec memeusamant an inin hardia.

An eol gant nec'hamant a vezo eclipsset,  
Epouvantus dan ol e vezo da voelet :  
Ac al loar a vezo quen ru evel ar goat :  
Honnas a vezo eun amzer a vo considerabl.

Ar steret a goco demeus ar firmamant,  
Ar mor en fulor, gant eun drous epouvant,  
A c'hourdrous dre e vœs dont da lonqua an douar  
A quement so ennan ebars en general.

Goude quement-se tout vo gulet rapportet  
An tan demeus an ev gant Doue digasset,

A devo en eun instant quement a vo voar ar bed,  
Ep respecti netra en poultr vesoint dewet.

En eur memeus instant a bed universel  
A vo dé commandet expres gant eun Arc'hæl,  
Dre an drous an drompill donnet da sortian  
Demeus o beio evit apparissan.

Sortiet deuz ar be a quitet an douar,  
Savet, corfo, a nevé, arri eo ar Varn general  
Ma vo ret rentan cont en presans o C'hrouer,  
Da gonfirman an arret deus ar Varn particulier.

Roue an ol Rouane eo a deu da c'hervel  
Ar bed antieramant, ep dont da dale pel,  
D'e n'em bresanti ol ebars en eun draouïen  
So hanvet Josaphat, ep laquat quen termen.

Evit expliquan dec'h an het ac al lec'het  
So en draouïen-man, Josaphat eo hanvet,  
P'emb cant pas het, tri c'hant a ledander  
So bars en draouïen-man, ar Scritur a verc scler.

Ebars en draouïen-man e vœler a hirie  
Ar form eur gador wen, el lerc'h guesal ma vœ  
Roet enni ar setans pa vœan condavnet,  
Voar venes Golgotha e vœ expédiet.

Ar maro a deu breman da bresanti sevel,  
Trubillet gant esclam, o clevet mœs an Æl  
Pini a vo clevet dre'r bed antieramant,  
Bete peuns an ifern bras, en creis an tourmant.

Eur brut an terruplan pini a lar dime  
Dont da n'em unissan breman gand ma Doue,  
En despet did eo ret donnet da sortian :  
Crenan a ran gand eston o tont d'apparissan.

Dirac an daoulagat deus a Varner ar bed  
Ar mor ac an douar ol en neus-ing formet,  
An ol astro en er, ar steres ac al loar,  
An eol er firmamant, ol e maint en glac'bar.

Ar mor en eun instant a rento ar c'horfo  
A so enni beuzet, tout en o c'hassemblo,  
Ac an douar ive quement so interret  
Ennain, aboe ma seo gant eun Doue crouet.

Evit o assembli en draouïen Josaphat,  
Tud santel, pec'herrien, a tud a bep sort stat,  
Da c'hortos ar Barner pa zisquen deus an ev  
Da jugi pepini herve stad e vue.

O Doue ! ma breuteur, heman vo eun devoes  
Ma comprenfemp ennan nin na bec'hfemp james,  
O voelet separi an eil deus eguile  
Gant eun Æl tout expres, dre ordrenans Doue.

En tu deo a vo laquet ar c'horfo triumphant,  
Brillantoc'h vit an eol gant e air eclatant ;  
A nense en tu clei e vo ar bec'herrien  
Tefaloc'h evit an nos gant e zefaligen.

Hennes vo, ma breuteur, ar separation  
A laquai ar pec'her en desolation,  
Mantret gant ar glac'har o voelet en deus bet  
Grasso digant Doue ac e neus negliget.

Malheur dimp, emeze, chetu ni er voes-man,  
Arri eo an termen n'ellomp mui resistan,  
Ma veomp condavnet het an eternite  
Dar flamo devorand gand guir Vap eun Doue.

Chetu ar re a moamp evite meprisans  
En tu deo laquet ebars en assurans ;  
Nin, o fiout re er bed ac en e vanite  
O caet re a estim vit ar mondanite.

Mencio deus ar bed deut d'en em diguerri,  
Garecq qucet voarnomp vit on assomi,  
A te, maro grevus, deus don aneantissa,  
Don laquat en ludu ma c'hefomp da netra.

Neuse e tisquenno ar Barner deus an ev,  
Ac e accompagnet gant eun nombr a Æle,  
A Sænt, a Sænteset, Prophetet, Ebestel,  
Sperejo evurus a nombr a dud santel.

Aviset, christenien, sellet deus ar pentur,  
Ar poltret a Jesus, Salver a Redemptur,  
O tisquen deus an ev er bed voar eur goabren,  
Evit donet da varn ann oll universel.

Chetu, ma breuteur, ar boquet agreabl  
Am boa hirrie an de da laquat dirac o taoulagad :  
Me o ped gand humilite da donen d'en compren,  
En ano Jesus-Christ, ar Barner souveren.

Ol fleurio ar bed deus an douar a sey ;  
Mæs homan, ma breuteur, a deu demeus an ev ;  
Rac se, me a c'houlen, pa oc'h en o silans,  
A c'houi so preparet a pur a gonsians.

Evit dont da reserv eur boquet quen divin,  
Pa jonjomp neubeutan on boan evit fin,

Pa zeuio ar maro, ar fin deus ou bue,  
Rac entre e saou sorn e rentfomp hon ine.  
Rac se, compagnones, men deu do suplian  
Da regli o pue en queit a ma veet voar ar bed-man ;  
Ar maro so subtil ac a dosta bepret  
A soupren cals a dut ac a ve en yec'het.  
Men deu do conjuri en ano ar guir Doue,  
Dont laquaat urs vat ebars en o c'hine,  
Rac ar Varn general na rei nemet confirman  
An aret a recefomp en on eur divezan.  
Me gare caet eur voes a ve quen eclatant  
Ma e'halfe clevet partout dre ar firmamant,  
Men a avertisse ar bobl ebars en general  
Da netaat o c'honsians a ben an de final.  
Jeremy ar prophet guechal a lamente  
Voar guer Jerusalem a partout en Jude,  
Pa voele dorn a coler demeus an Eternel  
Prest do reduisan, do laquaat en miser.  
Men a ra dec'h ive ar memeus avertissamant  
Da n'em brepari ol voar ben ar jugamant,  
Ma e'helfomp gant fians dont da apparissan  
A neuse en tu deo donnet de n'em blissan.  
Breman me a expliquo dec'h vel ma eo marquet scler  
Gant ar Tado santel el lezen ancien,  
Ar setans redoutabl a vezo prononcet  
Gand Mab an Eternel ebars er fin ar bet.  
Evel ma vo ar Barner ascet, vo guelet scleramant  
Ar pec'hejo cuset, neuse memeusamant,  
E vezo gant rigueur venget deus aneze,  
Ep respecti nicun, men a bromet dec'h se.  
Peb hini a renquo en de se perillus  
Respont a renta cont en presans on Jesus,  
Produet vo ar grasso a juget pep hini  
Dar joa pe d'ar flamó het an eternite.  
Perset vo ar e'hrimou en rigueur ar justis,  
Examinet ar foto, mesuret ar valis,  
Trempan rei e goler en goad ar pec'herrien,  
Se a rei de lisqui bars en tap an ifern.  
Ar monstr bras Lucifer, souveren an ifern,  
N'em bresanto eno a gantan e gac'hier,  
Pini a rento preuy a guement a neus groet  
Enep an decq gourc'hemen a so dimp commandet.

Chetu ase ma c'hac'hier, Barner ar virione;  
Examinet breman ar stad deus e vue :  
Ne c'houlenan netra ma ne neus din gleet;  
Autro, o couir dec'h, ma hini din dre droet.

O Jesus, ma breudeur, pebeus devez redoutel !  
Guelet an Æle memeus, tout int spouronet,  
Ac an ini so en ifern ar muia sur pluget.  
Dirac ar Barner bras a deuio da bresec.

Ar Voerc'hes gloriüs a beniguet meurhet  
A vo enno neuse ac e daou dorn juntet,  
A hi prest da glevet rei ar setans divezan  
Da oli ligne Adam, comprenet p'o pedan.

Da guentan ar Barner gant eur vijag joaus,  
O tistrçi en tu deo eus ar re evurus,  
Dre gomso familier deze e lavaro :  
Deut, tud biniguet, deut gane dan evo.

C'houi so bet en o pue guir jervigerien vat,  
Queit a ma voac'h er bed, a dime a dam Zad ;  
Evit o recompans e veet curunet  
Breman ebars er gloar, en pales an Dreindet.

En andret ar bevien c'houi so bet charitabl,  
Roet d'e an aluzen demeus a galon vat,  
Ous o paon o poa bet roet de da zibri,  
A roet de dillet vit en em soulagi.

O tistrei en tu clei e parlant evellen,  
Herve raport ar Scritur ous al lezen ancien :  
Me zo a neve deus an ev disquennet,  
Soufret poan evidoc'h ma vijac'h bet salvet.

Souffret em boa ive maro a passion,  
Exposet en eur groas da baea or ranson :  
Ma vijac'h bet fidel da huil ma gourc'hemen  
E vijac'h curunet en ev evit biquen.

Roet em boa en o toes ma fredicatoret,  
Covesourien santel a ma guir vignonet,  
Da gaet an absolver demeus o pec'hejo,  
Pa deujac'h do haet gant quun en o calono.

Touer, blasfemateur deus ma c'hano santel,  
En durant da vue, den barbar a cruel,  
A te o c'hout eun de a c'harige  
E renjes rentan cont e presans eun Douc.

Transgresset e teus bet ma ol gourc'hemenno  
O tont da vomissa dre goler blasfemo,

Ouspen e c'hout bet c'hoas guel exempl es pue,  
O sacri mallojo dirac tud da gontre.

Usulier milliguet, pelec'h e man ar gaj-se  
Deus ar mado as poa bet, lavar breman dime?

Den lach, den yen, deus a galon en andret ar bevien,  
O tont da rapinet digante o moyen.

Men so bet e ty alies quen affliget  
En personnag ar paour o clasq ma samiq boet :

Te teus bet ar galon da dont d'am refusi :  
Deus da anaon breman me deu de n'em venji.

Tud pinvidic, me o ped, sonjet en quemen-man :  
En silans un Doue, de ar Varn divezan,

Enep an dud ingrat ac an usullerien  
A refus o mado da souten ar bevien.

Den lubric miliguet, rent din breman cont,  
Gant da actiono te voa buon a pront,

Da glasq ar plasso secret da dont da gometi  
Heuil da bassion vil evit dont da bec'hi.

Te a jonge dide den ne vouige biquen  
Netra a guemen-se deus an nep a voa o roe,

Mes breman ar bed ol a voel da bec'hejo,  
Evit da recompans te souffro ar poanio.

Den gourmant obstinet, te garie ar cheriou mat,  
Pillier hosteleri, a te o c'hout er fat

Penos ar gourmandis a voa eur pec'het marvel  
A vige punisset dre ar poanio cruel.

Bars en hosteleri enno e voa da blas,  
O tibri, o c'hefa, memeus en deio bras,

Pere a moa consacret evit ma servigi :  
Te teus ing impliet evit dont da bec'hi.

Mes arri eo an de na elles mui tec'hel :  
Men venjo ac'hanout breman, den criminel ;

Elec'h da cherio mat te po naon a sec'het,  
Te a soufro poanio a vezo diremet.

Tud lach a diegus da sont d'am serviji,  
A herve ma lezen manquet da n'em regli,

Da c'heuil an offiso pere moa commandet ;  
Guel voa ganet c'heuil an danso miliguet.

Tud yaouanq, me o pet, sonjet en quemen-man,  
C'hui gar an ebato, eno man o c'holl joa :

C'heuillet o gouspero ive o c'hofern bret,  
Lest an assambleo pere so difennet.



Rac profani ar sul consacret da Doue,  
 Unan ar seis pec'het marvel eo ar re ze :  
 En de se, de ar Varn, e veet condamnet  
 Evit souffr ar poanio a vezo diremet.

Ar seis pec'het marvel ar ze eo ar pinno  
 Pere a gas an dud dreize an ifernio,  
 Rac-se mo supplian balamour da Doue  
 Da ober piuijen a chang deus a vue.

Goude ar reproch-man gret gant gouir Doue  
 A enep ar bec'herrien, e prononso goude  
 Ar setans redoutabl gant un er golerus :  
 Pelled divoui-me breman, c'hui ol dud malurus.

AR BEC'HERRIEN.

Pellec'h eta, Barner, e vezom exilet  
 Dre an arret o c'heus n'on enep prononcet ?  
 En pes corn deus ar bed e vezo on prison,  
 P'an d'e c'hui a gommant dimp-ni, Barner guirion ?

DOUE.

O prison a vezo en creis fons an douar,  
 En eur plas na voellet nac an eol nac al loar,  
 A n'o pezo enno a nep sort sclerigen  
 Nemert an nos antier, leun a defaligen.

AR BEC'HERRIEN.

Pe sort poan a souffrom eno ta, ma Doue,  
 Pa omp forbaniset dirac o Majeste ?  
 Tec'hel deus o presans a so dimp eur boan vras,  
 A bean exilet a dirac demeus o pisach.

DOUE.

Ar poanio a souffret n'o pezo quen partach ;  
 An tan deus an ifern a vo ho heritach ;  
 Ar mel en o c'hesquern a deuio da virvouï,  
 Gant ar riguer deus an tan o tonet d'o devoui.  
 Ar n'o pezo enne quen boet n'a quen breuvaj  
 Nemert naon a zec'het en creis ar poannio bras,  
 Gant an amprefanet, sourdet a touseget,  
 Gant erret furius en tan se devoret.

AR BEC'HERRIEN.

Mes, Barner souveren, p'an de ret dimp souffr poan,  
 Dre eur setans prononcet devoui ebars en tan ;

Da vianna eta na vezo fin abet  
Goude un nombr blavejo er poanio diremet.

DOUE.

Nan, biquen na finis o poan nac o c'hanquen,  
Entre vo tri ferson en eun Doue o ren :  
Eternel e vezo o poan ac o tourmant,  
A viquen e chompfet en tan se languissant.

AR BEC'HERRIEN.

Penos eta, Barner, chom biquen da lisquin  
En creis an tan ardant ep dont da gonsommi !  
Dre ar riguer deus an tan c'hellom bean devoet,  
Hep dale pel amser bars en ludu rentet.

DOUE.

Biquen na gonsomfet hed an eternite,  
Bepred veet en o pes o souffr ar poanio-se,  
Chom a refet antier en tan-se languissant,  
Hep ma teui da verrat eur momet o tourmant.

Pebeus eston a cri na oufe den compren  
A rei an ineo a ielo dan ifern,  
O laret adieu d'ar Voerc'hes a de Mab,  
Cri e vo ar galon ma na deu da dristat.

AR BEC'HERRIEN.

Adieu eta, Jesus, gand eur voes lamentabl !  
Adieu ta evit biquen, n'en oc'h pelloc'h on Tad  
Dre an arret o c'heus n'on enep prononcet,  
Adieu ta evit biquen, ret vo bean danvnet.  
Adieu, Cuerc'hes Vari, Rouanes deus ar gloar,  
Adieu, ni renq monet da gommans ou glac'har !  
C'houi a voa evidomp bepred avocades  
Ma vigemp bet fidel d'o pedi, Rouannes.

Adieu dec'h oll, Sent demeus ar barados,  
C'hui ya breman dar gloar, dar pales, da repos,  
A nin na nomp biquen nemert poanio sanglant  
Hep caet eur momet deus a soulajamant.  
Adieu dec'h, tensor caer deus ar gloar eternal,  
Nin on eus o collet dre ar pec'het marvel ;  
Malheur dimp ni biscoas ma voamp ni deut er bet,  
Pa eo ret dimp disquen en ifern diremet.

Chetu aze ar portret deus ar Varn divezan,  
Ario eun de pa sonjsomp nebutan ;

Na eller quet doeti anez renons d'ar feis  
Pa eo guir eo laret dre hano eun Doue.

Jesus, Roue ar gloar, c'hui vo ta ar Barner;  
Nin o ped da rei dimp grasso particulier,  
Da chanch deus a vue quent mont divoar ar bet  
A da ober piinigen demeus on ol pec'het.

Guerc'hes glorius Vari, Rouanes an Ales,  
Nin o ped da sellet ouzomp deus a druez;  
Bed evidomp bopret avocades fidel,  
Procuret ma c'hefomp d'ar joaio eternal.

O Sent a Sentezet, mignonet da Zoue,  
Intercedet evidomp dirac e Vajeste,  
Evit ma momp ar c'hras un de da n'en voelet  
Ebars ar Barados, en pales an Dreindet.

Adieu, compagnones, me deu da c'houl iscus  
Diganech' assambles ha digant va Jesus,  
O requeti dimp ol demeus a galon vat  
Ma veomp en tu deo en traouien Josaphat.

Birviquen, m'en assur, an avantach n'on bo  
Da n'em gaet assambles quen a veso eno;  
Adieu a laran dec'h, dre eur guir garante,  
Men a souet dec'h ol ar peoc'h abeurs Doue.

Ar peoc'h, an union, hennes eo ar fleuren  
So ral en amser-man en mescq ar Gristenien;  
Nemert leodouet a detractio, no,  
Lec'h ma queret, en quær, er paroujo.

An detractio, ar guel deot milliguet,  
A laqua desunion partout ebars er bet,  
Dre ma ze eun arme bulumus en ifern blerumet,  
D'e dispen a bejo on Salver biniguet.

Couscoude, ma breudeur, ma raemp reflexion  
Voar an dec gourc'hemen a roas Roue an tron  
Dar prophet Moïsas, voar diou dolen ven taillet,  
Ebars en tentur aour hi a voa rapportet.

Ar guentan taulen a gommand caret Roue ar gloar  
Dreis guemen tra a so crouet voar an douar,  
An eil a gommant dimp ol e n'em garet  
Pa omp dre memeus goat gant Doue unisset.

Mes e plas ar modesti gant Satan so laquet  
Evit decora coms al leon miliguet,  
Evel ar saltesto a enep or Salver  
Eus en accus guejal dirac Pilat barner.

M'en deu da laret dec'h evel sant Ian-Badeour,  
O coms deus faltesto Herodes den traïtour :  
*Lingam andeamsam Judea Dominus ;*  
Teulet plai, Christenien, rac ar Barner so just.

Allas ! ma breudeur ques, ma quaremp ni compren  
On bue er bed-man ne nemert un tremenaden,  
O sonjal alies bars 'en eternite,  
Pehini a bado entre ma vo Doue.

Diou eternite so, unan so ventuus  
Ac e so prepalet yit ar re evurus,  
Pere o devo heuillet an Aviel,  
O tont da pratican ar vertuio santel.

Allas ! un al so glac'harus da gompren,  
Bean da viquen danvnet en creis puns an ifern,  
Sonjet en se bemde, liessan ma c'hellet ;  
Tourmant so en eur plas, en un al joaustet.

Divar an teat-man me deu da remerqui  
An dud a bep quartier deus en em assemblé,  
Evit return ac'han pepini d'e gontre :  
Doue d'ho conduo bopret dre hent an ev.

Evit pa veomp er pors a salutation,  
O possedi on heritach en pales Roue an tron,  
Ma torfomp on sec'het er feunteun a vue  
A desiran dimp ol dre eur guir garante.

Da bep tra tout so fin nemet da c'hras Doue,  
Rac se, compagnones, me guemer ma c'honge,  
O soueti dimp ol ar gloar selestiel,  
En ano an Tad, ar Mab ac ar Speret-Santel.

---

Lanhuon, intañvez Ar Goffik, lecrer.